

Tabut ar WebNoz

Politikerezh yezh ar Rannvro



Miz a-raok an dilennadegoù rannvro, sell aze un abadenn gouestlet da bolitikerezh yezh ar Rannvro er c'hwech vloaz tremenet : hag aet an traoù war-raok ? Petra zo bet lakaet e plas ha daoust ha fonnus a-walc'h 'c'h a ar jeu ? Peseurt bilañs 'c'haller sevel war an dachenn-se, da heul labour Jean-Yves an Drian hag e skipailh ? En abadenn ispisial-mañ e responto ar Guzulierien Rannvro ouzh goulennoù Anne Gouerou, penngazetenner ar radioù e brezhoneg, Gwenaël Dage, kazetenner evit *Ya!*, ha Lionel Buannic.

Kuzulierien Rannvro pedet



Naig ar Gars
Kuzulierez Rannvro



Gérard Lahellec
Eil-prezidant ar Rannvro
e karg eus an danframmoù
hag an transportoù



Yann-Bêr Thomin
Eil-prezidant ar Rannvro
e karg eus ar politikerezh yezh



Françoise Louarn
Kuzulierez Rannvro



Louis Caradec
Kuzulier Rannvro

Muzik

Gimol Dru Band

«En o c'hav-arnod, sanket e donderioù Brest, ez eo gouestlet Gimol Dru Band da fardañ Rock'n'Dru : ur yod maget gant funkyp-hop ha punk'n'roll, ur son kennerzhus a ro c'hoant da lâret : "Zao ! War an hent !" Hag ar vandennad da vont krak ganti... » Sell aze testenn ginnig ar strollad leun a startijenn-se. Mechañs 'oac'h ket en soñj kousket dirak ho skramm !



Adskignet e vo an abadenn-mañ war



Kentañ WebTv 100% brezhoneg eo brezhoweb. Programmoù nevez, e brezhoneg, a vez kinniget ingal war ar chadenn bep bloaz : talk-shows, tresadennoù-bev, sitcoms, filmoù... Skoazellet eo brezhoweb gant Rannvro Breizh ha Kuzulioù-meur Penn-ar-Bed, Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan.

War 2 lec'hienn e vo skignet an abadenn war-eeun : brezhoweb.com, armortv.fr

Débat WebNoz Politique linguistique de la Région



Un mois avant les prochaines élections régionales, cette émission sera consacrée à la politique linguistique de la Région pendant ces six dernières années : les choses ont-elles avancé ? Qu'est-ce qui a pu être mis en place ? De façon assez rapide ou pas ? Quel bilan peut-on faire de l'action de Jean-Yves Le Drian et de son équipe ? Dans cette spéciale, les Conseillers régionaux invités répondront aux questions d'Anne Guerou, rédactrice en chef de l'information des radios en breton, de Gwenael Dage, journaliste à *Ya!*, et de Lionel Buannic.

Les Conseillers Régionaux invités



Naig ar Gars
Conseillère régionale



Gérard Lahellec
Vice-président
en charge des infrastructures
et des transports



Yann-Bêr Thomin
Vice-président
en charge de
la politique linguistique



Françoise Louarn
Conseillère régionale



Louis Caradec
Conseiller régional

Musique

Gimol Dru Band

« Depuis leurs labos tout-terrain des bas-quartiers de Brest, Gimol Dru Band fabrique du Rock'n'DruDru à vous décrasser les oreilles, pire qu'un jus-de-box en escale. Fusion de funkyp-hop et punk'n'roll, voilà une musique qui donne envie de dire "Zao! En route!", et ça déborde ! Les 5 larrons mijotent une fiévreuse sauce. Ainsi s'élance l'équipée sauvage... » Voilà comment le groupe se définit lui-même. Vous espériez dormir devant votre écran ? Raté !



Diffusion de l'émission également sur



Brezhoweb est **la première WebTv 100% en langue bretonne**. Elle propose 35 heures de programmes frais par an : talk-shows, dessins animés, sitcoms, films... Brezhoweb est soutenue par la Région Bretagne et les Conseils Généraux du Finistère, des Côtes-d'Armor et du Morbihan.

L'émission sera diffusée lors du direct sur 2 sites : brezhoweb.com, armortv.fr